

# Ur statud ofisiel evit hor yezh hag hor c'hultur!

Skol An Emsav !

LE COMITE CONSULTATIF DE L'AUDIO-VISUEL QUI ETAIT PROMIS DANS LE TEXTE DE LA CHARTE

SELLED HA


KLEVED---

Beeee...



OUAAAH  
MGN-MGN


Setu 10 bloaz /māñ  
staliet amāñ,  
pennek evel ul leue...  
Poent'va d'ar stad  
plegar...  
(\*)



UL LISANS WAR AR BREZHONEG HA POSTOÙ KELENNERIEN

Une licence de breton et la création de postes de professeurs de breton

(+) voilà 10 ans qu'il est installé ici,  
il serait temps que l'Etat cède leurs droits !!



UR SIKOUR A-BERZH STAD DA ZIWAN ARAOK MA VO LAKAET ER SERVIJ KELENN OFISIEL

Une aide de l'Etat à Diwan avant que ses écoles ne soient insérées dans l'enseignement officiel rénové



### MISTRÌ "VALEERIEN" EVIT AR SKOLIOU KENTAÑ DEREZ

Des maîtres itinérants de breton pour les écoles primaires

Talbenn Sevenadurel Araokour Breizh a c'halv kement den, kement strollad a vije e soñj ober un dra bennak evit ar brezhoneg hag hor sevenadur, da stourm evit ar poentoù diazez-mañ.

Le Front Culturel Progressiste Breton appelle chaque personne, chaque organisation désirant faire quelque chose pour la langue bretonne et notre culture à lutter sur ces mots d'ordre de base.

SKOL AN EMSAV.

UN STATUT OFFICIEL POUR NOTRE LANGUE ET NOTRE CULTURE !

# UR BLOAVEZH ARME TORR-REVR NEMETKEN?

Setu amañ da heul al li-  
zher bet Kaset gant Ji  
Killevere d'hon Aotrou Ministr  
muiañ - Karet ...

AO. QUILLEVERE GILBERT  
STREAD ~~██████████~~  
29000 KEMPER

D'AR 6 A VIZ MAE 1980

DA AO. MINISTR AN ARMEOU  
14 RUE SAINT DOMINIQUE  
75997 PARIS ARMEES

AOTROU MINISTR,  
DISKLERIAN A RAN BEZAN  
EZ-PERSONEL A-ENEK KRENN IMPLIJ AN AR-  
MOU E N'EUS FORZH PESEURT DEGOUZEZH. UN  
EMZALC'H DIAZEZ EO EVIDON HA VA FERSO-  
NELEZH A-BEZH A ZO GOUESTLET DA GE-  
MENT-SE.

E GWIRIONEZ, VA ARMOU  
A ZO AR BAL HAG AR PIG EVIT SEVEL UR  
BED GWELLOC'H E-LEC'H MA C'HELLFE AN  
HOLL DUD, DU, MELEN, RUZ PE WENN E VE-  
FENT, BEVAN E PEOC'H, DIEUB HAG EURUS.

O SERVIJ AN DENELEZH  
A-BEZH EMAON HEP DIFORC'H A OUENN, A  
VROAD, A RELIJION, A SKIANT-BEVAN. HA  
KEN STAG ON OUZH AR FRANKIZ, MA NE GAV  
KET DIN E C'HELLFEN EN EM ZISPAKAN  
PENN DA BENN E DIABARZH AN ARME. NE  
SONJ KET DIN, AO. MINISTR, E TALVFE AR  
BOAN DIN ARGUZENNIN MUIOC'H VA EM-  
ZALC'H.

KOLL A RIT EVEL-SE  
AUTROU MINISTR, UR SOUDARD SENTUS MET  
HARPAR A RIT IVEZ AN DENELEZH WAR HENT  
AN ARAOKAAT EN UL LAKAAT DA DALVEZOUT  
EVIDON AL LEZENN 71 424, EUS AN 10 A  
VIZ EVEN 1971, PEHINI A ZO GOUESTLET  
DA ZOAREOU 'ZO DA ZOUJAN OUZH AL LE-  
ZENNOU WAR AN ENROLLAN.

RESEVIT AUTROU MINISTR  
VA GWELEAN GOURC'HEMENNOU.

UR RESPONT EMAER  
O C'HORTOZ ...

TACTACTAC PAW

B3  
NANN





# bremañ

kazetenn ar stourmoù e breizh

Bep daou viz e vo kinniget deoc'h ur gazetenn nevez : **REMAN**. Kavout a reoc'h warni Keleier diwar-benn ar stourmoù e Breizh hag e lec'h all.

Roet 'vo warni ar gomz d'an holl re a vez o stourm, en un doare araokour, war dachennmañ-dachenn. Klask a raimp lakaat warni ar pep pouezusañ eus ar vuhez sevenadurel, sokial ha politikel.

Daouviziek e vo ar gazetenn er penn kentañ met hor pal a zo kinnig anezhi bep miz gant ma vo trawalc'h a dud o koumanantiñ.

Koumanantit eta !

## KOUMANANTIT !

Ma rit ho soñj koumanantiñ da v bremañ didroc'hit an tamm paper-mañ ha kasit anezhañ leuniet, asambles gant ho chekenn da : Bremañ

8, stæd Hoche  
35000 ROAZHON

ANV . . . . .  
ANV-BIHAN . . . . .  
CHOMLEC'H . . . . .

Koumanant reizh : 20 lur evit 6 niverenn  
Koumanant-skoazell : 30 lur (pe ouzhpenn)  
Koumanant broioù estren : 25 lur.



# UN STATUT POUR NOTRE LANGUE !

Comment réussir à donner à notre langue et à notre culture la place qu'elles auraient dues tenir depuis toujours en Bretagne, pour que nous puissions vivre en tant que Bretons dans notre pays ?

Quand on se penche sur l'<sup>hi</sup>stoire de la lutte pour la langue bretonne on voit que les demandes et les grandes déclarations n'ont jamais changé grand chose.

Le moment est venu de lutter pour des acquis de base, le moment est venu de gagner sur des points précis.

Le Front Culturel Progressiste Breton appelle chaque personne, chaque organisation désirant faire quelque chose pour la langue bretonne et notre culture à lutter sur ces mots d'ordre de base :

- Une licence de breton et la création de postes de professeurs de breton.
- Le comité Consultatif de l'Audio-Visuel qui était promis dans le texte de la charte.
- Une aide de l'Etat à Diwan avant que ses écoles ne soient insérées dans l'enseignement officiel rénové.
- Des maîtres itinérants de breton pour les écoles primaires.

Nous devrons obtenir ces revendications de base de l'Etat avant d'aller plus loin. Mais ne perdons pas de vue le véritable but que nous devons atteindre :

**un statut officiel pour notre langue  
et notre culture !**

# kenstrivadeg vrás bannoù treset

"DESSINER DES PETITS MICKEYS POUR ETRE RICHE ET ADULE DES FEMMES" (MANDRYKA).




## \* C'HWI

hag a gaoze Brezhoneg, C'HWI hag a chom betek diwezhat en noz e skeud ho koulou koar (?) o tresan boulo migou war ar paper.

C'HWI (a zo hir ho tent) hag a zo sur e teuy ar gloar koulz hag un anv kaer betek ennoc'h diwar an tresan.

C'HWI hag a huñvure bemnoz e vezò embannet hoc'h oberennou, nemet n'hoc'h ket gwall anavezet c'hoazh, siwazh ... !

AR C'HOÑKOUR-MAN 'ZO GRAET EVIDOC'H !!!



## \* C'HWI

hag a oar Brezhoneg koulz hag ar re gentañ nemet n'hoc'h ket gouest da zerc'hel an disterañ kreion etre ho pizied. Anevezout a reoc'h sur-mat unan bennak hag a zo diouzh ar patrom displeget uheloc'h. Tapit krog en ho mignon-treser : ar c'hoñkour-man 'zo graet evidoc'h ho taou !!!+



PEHINI EO HOR PAL ?

N'eo ket tamm ebet evit gounit arc'hant war ho choug, ez eo bet savet ar c'hoñkour-man, na kennebeut evit lavaret "ez eus e Breizh treserien koulz hag e Bro-C'hall pe marteze gwelloc'h, hag a ... Tra !

Evit reiñ un tamm lañs d'al "Lennegezh vrezhoneg" eo (hag e ouezit e peseurt stad emañ-hi) dre oberennou plijus ha ne vijent ket dre ret troidigezhioù diwar ar "Monstres sacrés" : Asterix, Lucky Luke, hag all ...

.../...



## PETRA A GINNIGOMP DEOC'H DA OBER ?

Sevel un istorig berr a-walc'h  
(un 10 pajennad bennak : 5 follennad pe muioc'h ma zo  
iñin ganeoc'h).



## DOAREOU AR C'HONKOUR

Ar c'hoñkour a zo digor d'an holl zoareoù bannoù treset gant ma ne vijent ket bet embannet dija. Degemeret e vo an oberennou betek ar 1añ a viz Gwengolo hag e vezint diskouezet d'ur Juri a zibabo ur 5 oberenn bennak (marteze 'vo muioc'h mard eo mat-spontus al labourioù, marteze all e vezoc'h an hini nemetañ peogwir e ouzomp holl ez oc'h an hini "pro" nemetañ.

Rentet e vo an oberennou en dro ma vez goulenet.



## PETRA 'ZO DA C'HOUNIT ?

Gouzout a ouzoc'h sur-mat n'eus ket Rotchilded ac'hanomp. Forzh penaos ne blij ket deomp tamm ebet an doare koñkour sod gant "1er prix" hag all... Setu e kinnigomp d'ar pemp bennak a vo dibabet embann o oberennou evit netra en ul levr moulet, hag ouzhPenn evit digoll anezho diouzh o foan (n'omp két evit digoll ar re all) o devezo pep a dregantad war ar gounid.




## TEKNIKACHOU

An oberennou a ranko bezañ treset gwenn-ha-du (ret eo evit an teknik), evit ar vent e ranko bezañ  $21 \times 29,7$  pe ur vent proporcionel (kenfeurel).

## KASIT REP TRA DA :

RANN AN EMBANN  
SKOL AN EMSAV  
8 straed Hoche  
35000 ROAZHON



... ARAOK AR C'HENTAN A VIZ GWENGOLO



# NANN D'AN DISTRUJ NUKLEEL !



PLOGO : AR CAPITALOURIEN O ZISKOUZEZ SPLANN PETRA 'VO DOARE AR VUHEZ GANT AN NUKLEEL : AN NERZH, AR SPONT, AR SOTONI, A-ENEV DA VOLONTEZ AR VRETONED DA CHOM DA VEDEV HA DA ZIVIZOUT EN O BRO.

SKOL AN EMSAV A STOURMO GANT TUD BRO AR C'HAP EVIT MA C'HELLINT BEZAN TREC'H WAR AR STAD CAPITALOUR.

SKOL AN EMSAV OC'H IMPLIJOUT YEH AR VRO ER STOURM ENEP-NUKLEEL, A ZISKOUZEZ EZ EO STOURM ENEP DA VOLONTEZ AN E.D.F., STOURM EVIT BEDEV EVEL BRETONED HA N'EO KET EVEL ROBOTED.

SKOL AN EMSAV A SONJ DEZHI EZ EUS DOAREOU ALL DA ZEGAS LABOUR ER VRO. ENERGIEZHOU NEVEZ A C'HELLFE BEZAN IMPLIJET : AN AVEL, AN HEOL, RED AN DOUR H.A. (LENN PLAN ALTER BREIZH).

NE FAOT KET DEOMP BEZAN POD-LASTEZ AR CAPITALISTED !

NUKLEEL ? NANN TRUGAREZ !

TRAWALC'H HON EUS BET GANT AR MAZOUT DIJA !

SKOL AN EMSAV



# petra nevez gant ar chekennoū brezhonek ?

ABAOE OUZHPENN UR BLOAZ, HE DEUS KINNIGET SKOL AN EMSAV D'AN DUD GOULENN UR CHEKENNAQUEG (UR C'HARNED-CHEKENN) BREZHONEK PE DIVYEZHEK DIGANT O BANK.

KALZ A DUD O DEUS KASET UL LIZHER D'O RENER-BANK.

AR C.M.B., HA NEMETAN, EN DEUS RESPONTE 'VO MOULET CHEKENNOU DIVYEZHEK D'AR RE A C'HOULENNO.

SANSET 'VINT PREST A-BENN NEBEUT !

SKRIVIT D'AR C.M.B. EVIT GOULENN GANTAN PEUR E TEUIO E-MAEZ AR CHEKENNOU DIVYEZHEK KEN GORTOZET !

A-HEND-ALL, DALC'HIT DA C'HOULENN KEMENT-ALL DIGANT HO PANK DEOC'H-C'HWI.

Da _____	Adverkad _____	Hollad _____
Deziad _____	Soldad da adverkañ _____	
 <b>Crédit Mutuel de Bretagne</b> Kef Kengredit		
Pacit evit ar chekenn-man NA CHELLER <b>KEINVERKAÑ NEMET</b> evit gourid un ti bank pe denhievvel Pavez contre ce chèque NON ENDOSSEABLE SAUF au profit d'un établissement bancaire ou assimilé		
da _____	B.P.F. _____	
Da vezan̄ paef e _____	Lec'h _____ Leu _____	D'an _____ 198 _____ I.e. _____
Da vezan̄ kempouezet e _____	Payable à _____	Compensable à _____
Chekenn Nn Chèque N° _____	Kont Nn Compte N° _____	Siadur _____
<i>pegoulz?</i>		

DEPUIS PLUS D'UN AN, SKOL AN EMSAV INVITE LES GENS A DEMANDER UN CHEQUIER EN BRETON OU BILINGUE A LEUR BANQUE.

BEAUCOUP ONT ENVOYE UNE LETTRE A LEUR DIRECTEUR DE BANQUE.

SEUL LE C.M.B. A REPONDU QU'IL SERAIT IMPRIME DES CHEQUES BILINGUES A CEUX QUI EN FERONT LA DEMANDE.

ILS SERONT PRETS D'ICI PEU, PARAIT-IL !

ECRIVEZ AU C.M.B. POUR LUI DEMANDER QUAND SORTIRONT CES CHEQUES BILINGUES TANT ATTENDUS !

AUTREMENT, CONTINUEZ DE DEMANDER LA MEME CHOSE A VOTRE PROPRE BANQUE.

SKOL AN EMSAV

RESPONTOU (PE LUC'H-SKEUDENN) DA GAS DA :

YB MOAZAN, 61 STRAED DINAN, 35000 ROAZHON .

# Ur statud evit hor yezh!

Penaos dont a-benn da lakaat hor yezh hag hor c'hultur da gaout e Breizh ar plas o dije ranket kaout a-viskoazh, evit ma c'hellimp-ni bevañ e-giz Bretoned e-barzh hor bro ?

Pa seller ouzh istor ar stourm evit ar brezhoneg e c'heller gwelet omp bet tro ha tro oc'h ober goulennoù pe diskleriadurioù bras, hep na vije bet cheñchet kalz an traoù.

Setu deut ar mare da stourm evit traoù diazez, setu deut ar mare da drec'hiñ war boentoù resis.

An Talbenn Sevenadurel Araokour Breizhek a c'halv kement den, kement strollad a vije e soñj ober un dra bennak evit ar brezhoneg hag hor sevenadur, da stourm evit ar poentoù diazez-mañ :

- Ul lisañs war ar brezhoneg ha postoù kelennerien
- Ar C'huzul-aliañ war ar sellad ha kleved bet prometet gant ar Chart (Comité Consultatif de l'Audio-visuel)
- Ur sikour a-berzh stad da Ziwan araok ma vo lakaet er servij kelenn ofisiel
- Mistri "valeerien" evit ar skolioù kentañ derez

An traoù diazez-mañ e renkimp kaout digant ar stad araok mont pelloc'h. Met arabat e vo ankounac'haat ar gwir pal n'hellimp ket ober heptañ :

## Ur statud ofisiel evit hor yezh hag hor c'hultur!